

PENNKERIOU koz an douarou glaz,
Taouarh, lann-gouez ha brug,
Ar greun a vreign, ar gwez a varv.

Pennkeriou koz gorreou didud,
Trezet gand daoulamm berr eur marh
A gemer aon rag trouz ar vein-sklent
O rikla diwar doennou divi,
Tebet ar spi heb lezel skeud.

Pennkeriou koz, larget digand an henchou douar
Ma'z eo torret o neudenn,
M'emaint o tineudenna er vouillenn hag el linad,
Er piz-logod, el lêz-bleiz hag en dréz
A douell, teir gwech ar bloaz, pôtr al liziri :
Eun bennak a skriv ne zeuio ket.

Pennkeriou koz, hentet a goz tudachou
N'o deus ket a zent da c'hwitellat ken
Nag a vouse'hoarz rag tarz an deiz pe ar vugale,
(Kennebeud-se mibien 'm boa, ma homer,
Pa ne jom gour ebet ganin !)
Nag a nadoziou er prenestri
Nag a zeiziadur ouz ar voger
Gand lizerennou ruz ar zuliou
A ra deoh gwiska dillad braz
Da vond da weled a-dost ar hleier,
Ar skouarn a zo bouzar, bet ar galon.

Pennkeriou koz, sanket en difounnusted,
Agatez pe gouarz glaz-ruz d'ho pavez,
Kaledet a c'hwezenn ha bara du,
Gwisket a raoskl hag a ganab,

VIEUX villages des terres bleues,
Tourbe, lande et bruyère,
Le grain pourrit, les arbres meurent.

Vieux villages des hauts déserts,
Traversés du galop poussif d'un cheval
Qui prend peur au bruit des ardoises
Glissant des toits fourbus,
L'espoir a fui sans laisser d'ombre.

Vieux villages largués par les chemins de terre
Dont le fil s'est cassé,
Dont le fil se défait dans la boue et l'ortie
Et la vesce et l'euphorbe et la ronce
Qui trompent le facteur trois fois l'an :
Quelqu'un écrit qu'il ne vient pas.

Vieux villages hantés de vieilles gens
Qui n'ont plus de dents pour siffler,
Plus de sourires pour les aubes ou les enfants,
(Avais-je donc si peu de fils, commère,
Qu'il ne m'en reste pas un seul !)
Plus de géranium aux fenêtres,
Plus de calendrier au mur
Avec les lettres rouges des dimanches
Où l'on revêt de grands habits
Pour aller voir de près les cloches,
L'oreille est sourde et feu le cœur.

Vieux villages plantés dans l'infertile,
Pavés d'agate ou d'améthyste,
Durcis de sueur et de pain noir,
Vêtus de roseaux et de chanvre,